


meurzh 1989



- evit darempredî an Tad
- noz Fask - 25 meurzh
- ar sul Fask - 26 meurzh
- eil sul Pask - 2 ebrel
- trede sul Pask - 9 ebrel
- pevare sul Pask - 16 ebrel

ar
fulenn 14

Darempredin an Tad...

Anavezout mat a reomp parabolenn ar mab foraner,e-giz maz omp boas d'he envel. Evelato e vefe gwelloc'h he zalbennif;parabolenn an tad foraner. Ur foraner,un drouvizier karantez. Tennet e vez an evezh,da gentañ,war ar mab pa vefe ret hen ober var an tad. E gwirionez,tenered diziwezh un Doue-Tad eo a zo diskleriet diimp an danevellig-se. "Tad ar c'hendrugarezioù" evel ma vezou anvet diwezhatoc'h gant Sant Paol(2 Kor.1.3). An holl a anzav ez eo unan eus ar c'haerañ skeudennoù a Zoue a vefe bet morse treset. Hogen,Mab an Doue-se E-unan eo en deus livet an daolenn-se.

Jezuz eo an hini en deus en em c'haet den evit diskleriañ dimp un Doue a zeu an arbenn d'an dud, en ur zigeriñ dezho bras e zivrec'h evel ma ra tad ar mab foran. An Aotrou Krist en deus graet ur vuhezadur (expérience) a Zoue, ken c'hwek ken don, ken uhel, kement a zanvez mat ennañ m'en deus fellet dezhañ lodennañ ganim ar garantez-se evit e Dad, ur garantez hag a zev anezhañ. Lavaret en deus, un deiz, "Pep tra a zo bet roet din gant va Zad..." N'eus ket bet roet dezhañ un impalaeriezh vedel, un diharzveli bennak, met pep anaoudegezh eus e Dad hag eus vennad a zo da vezañ dasroet d'an dud.

"Va Zad" setu erfin kreizenn an Diskuliadur. 'Ha kefridi nemeti ar Mab a zo dasreiff da vab-den ar pezh a oar-Eñ a-zivout e Dad,dre skiant-prenañ. Pa zigo-romp an avielou,ez eo sebezu мерzhout pegen alies e kaver ar ger "Iad" evit en-vel Doue,war muzelloù Jezuz. En e holl bedennoù e ra gant ar ger-se evit darem-predîn Doue. En arameeg:Abba. Ober a ra aze un dra n'en defe ur yuzev morse kre-det ober. Lakaat a ra da Zoue un any graet gantañ er vuhez pemdeziek:Abba,da la-varout eo Tadig. An hardizegezh a zo gantañ da vont da Zoue gant ger ur babig o-vont d'e dad,gredus hag enzilezus. Gant ar ger-se karget a garantez hag a zou-jañs arveret gant ar mab deuet bras evit komz ouzh e dad.

Horse ne vije deuet war spered ur yuzev treisf oush Doue gant ur gerienn kerdichek. Amañ ez eus eta gant Jezuz un dra bennak nevez hag iskis. Pebezh darem-

An Tad ne gomz ket, war-eeun, ouzhimp. Diskleriet eo gant e Vab. Gant an duvez, alies, ar mab a ro e dad da anavezout. Kuzhet eo an Tad "en ur sklerijenn dizarempredus" (1 Ti 6.7). Met Jezuz a Nazared, Mab peurvat, a zo skeudenn peurvat, stumm peurvat, leuriad peurzisi e Dad en hor c'hichen dimp-ni. Kement jestri kement emzalc'h, kement ober, kement soñj a zo gant Jezuz a lavar dimp piv eo Dou-

Hag hor pediñ a ra, hor gervel a ra d'ur vuhez a vad, d'ur vuhez a grouadur, vugel. Fellout a ra dezhaf hon dibradañ, holl, betek e Dad hag hon Tad. Delleze en deus evidom an perzh da vont dian Tad betek penn.

Hogen ,graet e vez allies e-giz ma vijje Jezuz an Nazaread an termen hag an ger diwezhaf war an Aotrou Doue. Eñ, koulskoude, ne chom morse en tu-mañ dezhaf E-unan:mont a ra larkoc'h egetaft E-unan. Ne baouez ket da ober dave d'an Tad. Ne ehan ket da ziskouez gant e viz an Hini maz omp bleniet gantaft betek ennañ. Bevez eo eta un poent-loc'haf ha n'eo ket ur poent-echuif. "Pa vez diskouezet al loar, gant ar biz, eme ur c'hrennalavar sinaat, ar genaoueg a sell ouzh ar biz hañvan ouzh al loar." Jezuz eñ ar oñs tiskouez an Tad, o vezzañ maz eo an Hante.

rour, an Iremen. Evelato ar gentel a zo gant ar c'hrennlavar-se a rank bezâñ di-
nerzhet, rak war dachenn ar Feiz, an Hini a ziskouez a zo kement hag an Hini dis-
kouezet. Koulskoude, an nep piv bennak na barrfe ket e sellou nemet war ar biz en
em douelle hag a vreinfe, a zismantrfe ster buhez, marv ha dasorc'h Jezuz Krist.

Bez e c'hellomp anavezout ar Hab hag evelato an Tad a zo un estren evidomp. Ma ne vez konzet nemet eus Jezuz ha Jezuz hepken e tisofjer ez eo Hab Doue an Tad. Dont a ra da vezaf neuze un idolenn zenel. Ar Hab disrannet diouzh an Tad. N'eo neuze nemet un hent-dall. Eñ hag en deus distaget un deiz:"Ne eo an Hent.." Un hent a ya d'un tu bennak. Jezuz n'eo ket un "hent" ned a da du ebet. Eñ eo an Hent hag a ya davet an Tad. Ha pep striv da dizhout, war-eun, an Tad na dizh nemet un Doue bennak:un idolenn zoueal. Ar gwir Dad ne vez tizhet nemet dre ar Hab.

Arabat sac'haf er C'christ evel un termen,evel un dibenn-hent. En em lezkom
avat da vezaf bleniet ha sachet gantañ betek an eienenn,betek an oaled,betek
an Tad. Ar griteniezh wirion a zo pignadur war-du an Tad da heul ar Hab. Er
Hab. Rak seul-vui ma spiegomp ouzh Jezuz ar Hab,seul-vui e teuom da vezaf ar
pezh maz omp, nibien ha merc'hed d'an Tad. Ward eo diank an Tad em buhez,ez eo o
vezaf ma n'emaou ket c'hoazh en va aes e ser ar Hab. Chom a ra c'hoazh ar Hab e
vidon ur skouer diavaez,ur blenier estren din.

En em stagaf ouzh ar Hab, en ur bleustrif vertuzioù mabel, vertuziou kroudeurrel. Sant Vazhe (18.15) a zanevell dimp penaos e c'halvas Jezuz, un deiz, ur bugel hag e laakaas anezhañ dirazo, en ur lavarout: "Deoc'h e tiskleriañ hag ar wirionez a zo ganin, ma ne gemit ket evit dont de vezāñ evel bugale, ned afoc'h ket e Rouantelezh an Nefvōu."

An Tad ne c'heill ober netra gant tud-gour lorc'hus gag orbidis. C'hoantaat a ra kaout mibion en e Vab hag a gav blaz gant al levenez d'E envel Tad, gant un dedered vras, d'E santout ken mat ha ken nes outo. N'eus nemet ur gopr hekper had a dilean kaout c'hoant dezhaf: e veve laouen an Tad ganin a hini eo.

Youenn Troal - 8 meurzh 1989 -



noz fask

lennadenn gentañ ar veihadeg- (pedomp sioul) Doue, evit dasparzhañ karantez, te neuze unan da garout a-dal dit. Kanet ac'h eus da Garantez d'an den; hemañ, ali-es, n'en deus ket diskaret d'ar Garantez-se.

Aotrou Krist, peurzalc'h et gant ar Spered Santel, adsevel a rez, adkempenn a rez ar Grouadelez diskaret ha drastet. Meuleudi ha trugarez dit!

Lennadenn eus Levr ar C'heneliezh-1.26-31/2.1,2,3.

(AL LENNADENN VERRAN)

- 26 Hag e lavaras Doue :
 - Gremp an den diwar hor skeudenn, heñvel ouzhimp, hag e reno war besked ar Mor, ha war evned an Néïvou, ha war ar chatal ha war an holl loened gouez, ha war gement amprevan a ruz war an Douar. »
- 27 Hag e krouas Doue an Den diwar e skeudenn. Diwar e skeudenn e krouas anezhai : gwaz ha maozez e krouas anezho.
- 28 Hag e vennigas Doue anezho hag e lavajas Doue dezh :
 - Fouezhil ha kreskit, ha leugnif an Douar ha sujil anezhañ, ha renif war besked ar Mor ha war evned an Néïvou ha war gement tra bev a ruz war an Douar. »
- 29 Hag e lavaras Doue :
 - Selu! e roan deoc'h an holl c'heol oc'h ober had hag a zo war c'horre an Douar a-bezh; hag an holl wez a zo enno frouezh oc'h ober had. Deoch' e vezint da voudet. »
- 30 Ha d'an holl loened gouez ha da holl evned an Néïvou ha da gement a ruz war an Douar hag a zo ennañ ene bev, (e roan) holl c'hizur a geol evel boued. »
- 31 Hag e vev evel-se : Hag e welas Doue kement en devoa grael. Ha setu e oa mal-lie.

eil lennadenn ar veihadeg- (pedomp sioul) Doue, hon Tad, dieubet ac'h eus da Bobl eus dorn an Ejipsiad. Da Bobl a zo bet di-frammet ganit eus ar marv ha kaset ganit d'ar vuhez.

Aotrou Krist, hon salviñ a rez eus marv peurbadel. Briatañ a rez an Iliz, da Bried. He gwalc'h a levenez dreist-fonnus a roez dezhi. Peurleuniet eo ganit a furnez. Reñ a rez dimp ur galon nevez. An hollved a drid hag a flamm. Setuni, badezet, dieubet, en hor sav, bev! Dit va devezhioù, dit va bennozhioù, dit va zrugarekadennou!

Bugale Israel o trouzñ ar Moi-Ruz.

LENNADENN EUS LEVR AN ERMAEZIADEG 14.15 - 15.1

- En deiziou-se e lavaras an Aotrou Doue da Voizez :
- 15 • Perak a kriez evel se war-du ennon? Lavar da Vibion Israel kerzhoul war-roak.
 - 16 Hogen le, sav da vazh hag astenn da zorn war ar mor ha faou anezhañ en daou evil ma c'hello Mibien Israel, nonn dre greiz ar mor, war ar sec'h
 - 17 Evidon-me aval, ez an da gädeon kalon Ejipliz evil ma 'z aint ennañ war ho lerc'h-chwi; ha me a danno gloar waron vâ-unan diwar goust Faraon hag e holl armead, e giri-engann hag e varc'hegerien.
 - 18 Hag Ejipliz a ouezo ez on me an Aotrou, pa vezin bel goloet a c'hoar diwar goust Faraon, e giri hag e varc'hegerien. »

noz fask

Neuze Aotrou Doue hag a gerzhe e penn arme Israel, a ziolasas hag a yeas d'en em lakaat a-diek dezh; ar pilierad-koab hag a vezet en o rôk, a ziblasas ives hag en em zalc'h as a-diek dezh.

- 20 Dont a reas d'en em lakaat etre armead Ejipliz hag armead Israel; leñval e oa ar goañenn diouzh un lu, met diouzh an tu all e skilérie an noz. Hag an div arme ne dostajont kel an eil d'eben a-hed an noz.
- 21 Astenn a eure Moizez e zorn war ar mor hag an Aotrou a vountas ar mor war-gil gant un avel greiz a tonel eus lu ar sav-heol, a-hed an noz; disec'hant a reas ar mor hag an douteier en em rannas.
- 22 Mont a reas Mibien Israel dre greiz ar mor, war ar sec'h, rak an dour a rae evito ul voger a-zehoù hag un all a-gleiz.
- 23 Ejipliz a yeas war o lerc'h : holl gezeg Faraon, e giri hag e varc'hegerien a yeas d'o heul dre greiz ar mor.
- 24 Met da goutz ar veihadenn-veure e sellas an Aotrou Doue eus kreiz ar pilierad Ian ha koabi, war zu armead Ejipliz hag e lakaas dizurzh da sevel er o renkadoù.
- 25 Skorañ a reas rodou ar c'hirri ken ne c'helle miui ar remañ mont war-roak nemet gant poan. Neuze e lavaras Ejipliz : « Tec'homp dirak Israel, rak eman an Aotrou Doue o sloum evito a-enep Ejipliz. »
- 26 Hag e lavaras an Aotrou Doue da Voizez :
 - Astenn da zorn war ar mor, hag e listroio an dour war Ejipliz ha war o c'hirri ha war o marc'hegerien. »
- 27 Ha Moizez da astenn e zorn war ar Mor, ha da darzh-an-deiz, e listroas ar mor d'e lech'kenfai. Ejipliz o lechel kuit a gavas ar Mor war o hent, o tonel wamo, hag an Aotrou Doue o elpennas e-kreiz ar Mor.
- 28 An dour o tonel war e giz a c'holos ar c'hirri, soudarded war-varc'h holl armead Faraon hag a oa ael ar Mor da heul Mibien Israel : ne achaps hini ebet anezho.

XV. I Met Mibien Israel a drenzas war ar sec'h dre greiz ar Mor, hag an dour a rae evel ul voger en lu dehou hag en lu kleiz dezh.

- 29 Evel-se, en deiz-se e tennas an Aotrou Israel eus daouarn Ejipliz hag e welas Israel korfou marv Ejipliz en o gourvez war an an.
- 30 Evel-se e welas Israel ar galloud bras en devoa an Aotrou diskouezel a-enep Ejipliz; hag ar bobl a savas doujarts en he c'hreiz ouch an Aotrou hag a gredas en Aotrou hag e Moizez, e servijer.

Neuze e kanañ Moizez ha Mibien Israel ar ganenn-mañ d'an Aotrou Doue. Setu amañ ar c'homzou anezhi :

kempedenn- Aotrou Doue, en Noz Santel-mañ, hoc'h eus lakaet da lugerniñ gant gloar, hor Salver o sevel d'ar vuhez, / plijet ganeoc'h eta niroot et gristenien nevez a zo bet ganet deoc'h, ar spered a zo dezh bezaf ho pugale, ma c'hellint nevesaet a gorf hag a galon, bezaf guir servijeron deoc'h. Dre.....

lennadenn gentañ an oferenn- Badezet ez omp bet. Hag e perzhiomp endev e Darsorc'hidigezh ar C'hrist. Bevomp eta e giz tud dasorc'het hag e vezimp gantañ, un deizer c'hlod. »

noz Fask

«Ae C'hris adavet da vev ne varv mui.»
LENNADENN EUS LIZHER AN ABSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN ROMA.

- Breudeur ! 6,3-11
 3 Evel ma ouzoch', ni hag a zo bet badezet ei C'hris ez eo en e Varv ez omp
 bel badezet.
 4 Lakel omp bet er bez a-unan gantañ dre ar Vadeziant evit mervel hag evit ma
 reiñemp ur vuhez nevez ni iveau,
 evel m'eo adsavet ar C'hris die c'halloud gloriis e Dad,
 a-douez ar re varv.
 5 Rak, mar doimp bel unanet-strizh gantañ dre ur marv heñvel ouzh e hini,
 e vezimp iveau heñvel outañ dre un dasorc'h (resurekcion) heñvel ouzh
 e hini.
 6 Soñjomp ervat e kement-inai :
 an den kozh hag a zo ennomp a zo bet staget ouzh ar groaz war un dro gantañ
 evit ma vele distruket an natur-se a bec'hed,
 hag evit na velemp mui sklaved ar pec'hed.
 7 Rak an hini a zo marv a zo dhuñset diouzh ar pec'hed.
 8 Neuze 'ta ma'z omp tremenet dre ar marv asamblez gant ar C'hris,
 e kredompe e vezimp iveau asamblez gantañ.
 9 Rak evel ma ouzomp e gwirionez :
 ar C'hris savet a varv da vev, ne varv mui,
 an Ankou n'en deus ket a gog warnañ ken.
 10 Rak marvel eo bet,
 met d'ar pec'hed an hini ez eo marvel ur wech evit mat;
 met bienn ezo bev, hag evit Doue an hini emai o vevañ.
 11 Evel-se c'hwi jvez :
 en em sellit evel marv d'ar pec'hed,
 met bev evit Doue e Jezuz Krist, hon Aotrou.

SALM 117 1-2,16 ab-17, 22-23.

¶ ALLELUIA! ALLELUIA! ALLELUIA!

- 1 Lavarit bennoch da Zoue, rak mat eo
 Rak peurbadus eo e garantez.
 2 Ra luvro Ti Israel :
 Peurbadus eo e garantez.
 16a Dorn dehou an Aotrou 'n deus graet traou kaer
 E zorn dehou 'n deus va adsavet.
 17 Ne varv in ket, met bevañ 'rin
 Hag e kontiu aberiou an Aotrou.
 22 Ar maeñ taolet kuit gant ar vasonerien
 'Zo deuet du rezoi Muen-Korn.
 23 A-berzh an Aotrou eo bet graet kement-se
 Tra virzhiudus dirak hon daoulagud.

noz Fask

AVIEL BLOAVEZH C

¶Perak klask e-louez ar re varv an Hini "zo bev?"

LENNADENN EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT LUKAZ 24, 1-12

- 1 En deiz kenlañ eus ar sizhun, diouzh ar mintin, eus an abretañ, e leus ar
 merc'hed d'an bez ha ganlo al louzeier c'hwez-val o devoa aozet.
 2 Kaoul a rejont ar maen ruihel a-zirak ar bez,
 3 met o vezan aet e-barzh, ne gavijont ket korf an Aotrou Jezuz.
 4 Ha selu pa ne ouient ket petra da soñjal war gement-se, en em ziskouezas
 danu zen dezho gant dilhad lugernus.
 5 Evel ma oant sponter ha ma plegent o lenn war-zu an douar, e tavaras ar re-
 mañ dezho :
 6 Pérak e klaskit e-louez ar re varv an Hini a zo bev ?
 7 N'emañ ket amari, met savel eo da vev. Ille pel sonj e peseurt stumm en deus
 hel komzel ouzhoc'h p'edo c'hoazh e Galilea, pa lavare :
 8 Rel eo da Vab-an-Den bezari lakaet elre daouarn ar bec'herien, bezañ stagel
 ouzh ar groaz, ha d'an trede deiz dasorc'haf.
 9 Neuze e leus da soñj dezho eus e gomzou.
 10 Pa oant deuel en-dro eus ar bez, e legemennjont an holl draoñ-se d'an Unneg
 ha d'an holl regio all iveau.
 11 Bez'e oa amezho- Mari-Madalen, Yoanna, ha Mari, mamm Jakez; ar merc'hed all
 hag a oa ganto a gontas kement-se iveau d'an Ebeslet.
 12 Met ar chomzou-se a seblantas dezho hezañ sorc'hennou ha ne gredjont ket ar
 merc'hed.
 13 Pérak koulskoude a savas hag a redas d'ar bez:
 hag o vezan soublie e benn, ne welas nemet ar bandennou
 hag i listros d'ar gér, souezhet gant ar pezh a oa c'hoarvezet.

var ar profoù- Plijet ganeoc'h, Aotrou Doue, degemerout ar pedennou a ginnig ho
 pobl deoc'h a-unan gant he frofrô, ha peogwir o c'hinnigomp de-
 oc'h, er penn-kentañ eus Gouelioù Santel Pask, grit ma talvezint dimp, gant sko-
 zell ho kras, da zigeriañ dimp dor ar vuhez peurbadus. Dre Jezuz Krist...

rak-kanenn veur - E gwirionez, Tad Santel, Doue hollc'h halloudek ha peurbadet, un
 dra reizh ha dleet eo ho trugarekaat e pep lech'h hag e pep
 anzer, dreist-holl ha gant brasoc'h meuleudi en Nozvez Santel-mañ maz eo bet
 Jezuz Krist, hon Dan-Pask lakaet d'ar marv evidomp. Rak-Êñ eo an Dan gwirion en
 deus dilamet pech'ed ar bed, en deus en ur adsevel eus ar bez, roet dimp en-dro
 ar Vuhez. Setu perak, gant Gouelioù Santel Pask e trid ar bed a-bezh en ur mor
 a levez, hag holl Spredoù galloudus an Neñvoù a gan meuleudi d'ho kloar, en
 ur laverout da viken:

antifonenn ar gomunion -(antifonenn ar c'cheduniñ) An Aotrou Krist, hon Dan-Pask
 a zo bet aberzhiet, debromp eta bara hep goell al lealded
 hag ar virionez. Alleluia.(I Kor.5.7-8)

pedenn goude komuniañ - Skuilhit ennomp, Aotrou Doue, Spered Santel ho karantez,
 hag ar re hoc'h eus maget gant ar Sakramant, e-kerz
 Gouelioù Santel Pask, grit ma vint unanet-mat kenetrezo a spered hag a galon.
 Dre Jezuz Krist, hon Aotrou..Amen!

ar sul Fask

kanenn mont-tre- salm 130- Me a zo adsavet hag a zo ganeoc'h hepred:lakaet hoc'h eus ho torn warnon: burzhudus ez eo en em ziskouezet ho furnez, alleluia!

kempedenn- Aotrouù Doue,da geâver an Deiz-mañ,dre ho Mah unganet o trec'hijâ war ar marv,hoc'h eus digoret dimp dor ar beurbadelez,roйт dimp ar c'hras,ni ho ped,pa lidomp Gouel bras hor Salver o sevel a varv da vev,da vezañ nevesaet gant ho Spered Santel,ha da sevel,ni iveau,da sklerijenn ar gwir Vuhez.

lennadenn gentañ - War desteni an Ebrestel ez eo diazezet hor feiz er C'christ Da-sorc'het. Dreist-holl,war hini Pêr,penn an Iliz.

1^{er} LENNADENN

An Ebrestel hag Ispisial Sant Per, Iesloù eus J.K. adsavet a varv da vev.

LENNADENN EUS LEVK OBEROU AN EBESTEL 10, 34*,37-43

- 34 (T'en em gavas Pêr e Kæzareia, e li Gornelius, kantener eus an arme Roman) e lavaras :
- 35 e Chwi a oar petra a zo c'hoarvezel die Vio-Judea en he lezh, adalek ma ligoras an traou e Galilea, goude ar vadéziant bet prezegel ganl Yann.
- 36 Diwar-benn Jezuz a Nazared : Doue en deus sakrel anezhañ ganl eoul dre ar Spered Santel hag hen kargel a nerzh.
- 37 Tremenel en deus oc'h ober vad hag o parean ar re holl a oa gwasket ganl an diaoul : rak Doue a oa ganlañ.
- 38 Ha ni a zo lesloù da gement tra en deus grael e bro ar Yuzevien hag e Jeruzalem.
- 39 Hen lakaet o deus d'ar marv en ur slagañ anezhañ ouzh ur groaz-koad.
- 40 Mel Doue en deus e zasor'hel d'an trede deiz, ha grael dezañ en em ziskouez.
- 41 N'eo kel d'ar bobl a-bezh, mel da destou hel dibabel en a-roak ganl Doue, dimp-ni hag hon eus debiel hag evel ganlañ, goude ma oa adsavet a-douez ar re varv.
- 42 Ha roet en deus dimp ar gart da brezeg d'ar bobl ha da desteniñ ez eo Hennezh a zo bel diazezel ganl Doue evel barner ar re vev hag ar re varv.
- 43 Dezañ e loug an holl broaled an testeni-mañ : **eus** kemen-l-hini a gred ennañ a resev drezañ ar pardon **eus** e bec'hejou.

SALM 117 1-2,16 ab-17,22-23.

R/ 28 HEMAN EO AN DEIZ EN DEUS GRAFT AN AOTROU DEIZ A JOA HAG A LEVENEZ.

- 1 Lavarit bennozh d'an Aotrouù , rak mat eo Rak peurbadus eo e garantez !
- 2 Ra lavaro Ti Israel : Peurbadus eo e garantez .
- 16 Dorn dehouù an Aotrouù 'n deus graft traou-haer E zorn dehouù 'n deus va adsavet.

ar sul Fask

- 17 Ne varvin ket, met bevai **rim**
Hag e kontin oberou an Aotrouù.
- 22 Ar maen taolat kuit gant ar unsonerien
'Zo deuet da vezañ maen-korn.
- 23 A-herzh an Aotrouù eo bet grael se..
Tra vurzhudus dirak hon daoulagad .

eil lennadenn- Lidaf ar soñj eus an Dasorc'hidigezh a zo, war an hevelep tro ober dave da Aberzh ar C'christ ha da aberzh holl arroudou ar pec'hed ennomp.

2^{er} LENNADENN

Bevai a-unan gant Hor Salver dasorc'het.

LENNADENN EUS LIZHER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN GORINTOZ 3, 1-4

- 1 Breudeur !
C'hwi a zo savel a varv da vev a-unan gant ar C'christ ; klaskit elta an traou eus an nec'h (*kreac'h*) e-lec'h m'eman ar C'christ azezel en tu dehouù da Zoue.
- 2 Troit ho karantez war-zu an traou eus krec'h ha nann war-zu traou an douar.
- 3 Rak c'hwi a zo marv , hag ho puiez a zo kuzhet a-unan gant ar C'christ , e Doue.
- 4 Met pa en em ziskouez zo ar C'christ , eñ hon huhez , neuze c'hwi iveau en em ziskouezo asambles gantañ e-kreiz ar C'hoar.

1 Kor. 5,7b-8a Allélia !
Hon Ouv Pask a zo bet sakrifiet
Ar C'christ eo !
Debromp gant levenez
Pred an Aotrouù !
Allélia

LENNADENN EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN 20, 1-9

- 1 En deiz kentañ eus ar sizhun, Mari-Madalen a ya abred diouzh ar heure, pa oa leival c'hoazh, d'ar bez, hag a wel ar maen lamet kuit a-ziwari ar bez.
- 2 Hag hi da redek ha da vont da gaoul Simon-Pêr hag an diskibl all karel gant Jezuz : ha lavarout a reas dezhzo : « Savel o deus an Aotrouù kuit eus ar bez, na n'ouzomp ket pelec'h o deus a lakaet. »
- 3 Neuze ez eas Pêr hag an diskibl er-maez evit mont d'ar bez.
- 4 Redek a raent o-daou war un dro- met an diskibl all-se a laislas war Bêr, dre ma rede buanoc'h, hag a zegouezhas da gentañ er bez.
- 5 O vezañ plegel e benn e welas war an douar ar bandennoi, Met koulskoude ne deas ket e-barzh.
- 6 D'e dro e tegouezh Simon-Pêr hag a oa ouzh e heul , mont a reas er bez ; hag e wel

ar sul Fask

- , ar bandennou war an douar, hag iveau al liennenn a oa bet war e benn :
homañ aval, ne oa ket gant ar bandennou,
mel disparli rollat e ul lec'h e-unan.
- Ha neuze ech'an treas an diskibl all iveau,
bet degouezhet da gentañ er bez;
gwelout a reas ha kredif a reas.
- Rak n'o devoa ket c'hoazh komprenel ar Skrilur o lavarout e llec adsevel
a-douez ar le varv.

war ar profoù- E-kreiz levezh gouelioù Pask e kinnigomp deoc'h,Aotrou Doue,an aberzh a gav an Iliz,drezañ,buhez nevez ha bevañs. Dre...

rak-kanenn veur - E gwirionez,Iad Santel,Doue holle'halloudek ha perubadel,un amzer,met dreist-holl ha gant brasoc'h meuleudi,en Deiz Santel-mañ,maz eo bet Jezuz Krist,hon Oan-Pask,bet lakaet d'ar marv evidom. Rak Ef eo an Oan gwirion en deus dilamet pec'hed ar bed. En deus,en ur adsevel eus ar bez,rôet dimp endro ar Vuhez. Setu perak,gant Gouelioù santel Pask e trid ar bed a-bezh en ur mor a levezh,hag holl Spredoù galloudus an Nefvoù a gan meuleudi d'ho kloar,en ur lavarout da viken...

antifonenn ar c'heduniñ - I Kor.5 - An Aotrou Krist,hon Oan-Pask,a zo bet a-herhiet. Debromp eta bara hep goell al lealded hag ar virionez. Alleluia!

pedenn goude keduniñ-

Divallit hep ehan hoc'h Iliz,Aotrou Doue,gant madelez h a karantez. Adnevesaet eo bet gant Misteriou Pask,grit dezh i eta erruout e slpannder an Adsav d'ar Vuhez. Dre Jezuz Krist,hon Aotrou.

- It e peoc'h hor Salver ! Alleluia,alleluia!
- Bennozh da Zoue,alleluia,alleluia!



eil sul goude Pask

kanenn mont-tre- Evel bugale nevez ganet,klaskit al laezh pur,laezh ar spred,e-vit ma kreskot gantañ evit ar silvidigezh,alleluia!

kempedenn- Aotrou Doue,c'hwi hag a zo peurbadel ho trugarez,gant gouelioù Pask o tistroñ bep bloaz,ec'h entanit feiz ar bohl a zo goustlet deoc'h, kreskit eta ar c'hras hoc'h eus roet,evit ma kompreño an holl,evel maz eo dilec, gant peseurt badeziant ez int bet gwalc'het,gant peseurt Spred ez int bet ganet a-nevez ha gant peseurt Gwad ez int bet dasprenet. Dre Hor Salver Jezuz Krist...

lennadenn gentañ- Kalz a dud en em stage ouzh an Aotrou dre ar feiz.

Ian LENNADENN

Ar burzhudoù graet gant an Ebostel hag o frezogannoù a likao niver an dud fideli da , greskiñ.

LENNADENN EUS LEVIT OBEROU AN EBESTEL

5,12,16

- 12 Dre zaouen an Ebostel e c'hoarvezet sinioù ha burzhudoù niverus e-touez ar bohl.
Kusum e oa an holl (gristenien nevez) d'en em vodañ gant ur spred hepken, din dan horched Salomon;
- 13 met a-zivaez dozho den ne grede en em stagañ outo; met ar bohl kouskoudo o neule uhel,
- 14 hag ourzhenn-se, war greskiñ eo ne niver ar baotred hag ar marc'hed a grede en Aotrou, kement he kon bihan ma vezeg degaset war ar plasennou ar gloñvourien hag e lokaent anezho war gweleod ha krivizhier, evit ma c'hellje da vihanañ skend Pôr, pa dremenje, kouzhanñ war hini pa hini anezho;
- 16 heg en em zastum a rae ur bohl a dud eus ar c'heriou diwar-dro Jeruzalem hag a zegasa klanvourien ha tud gwylgaset gant spredoù lous, hag e vezent holl parent.

SALM 117

2-4, 22-24, 25-27a

- R 1 Lavarit bennozh da Zoue, rak mat eo.
Rak peurbadus eo e garantez. (In Alleluia)
- 2 Ra lavoar Israel : Peurbadus eo e garantez
- 3 Ra lavoar Ti Aaron : Peurbadus eo e garantez
- 4 Ra lavoar ar re a zouj an Aotrou : Peurbadus eo e garantez.
- 22 Ar Maen taolot kuit gant ar vasonerien
A zo deuet da vezañ Maen-Korn
- 23 A-berzh an Aotrou eo bet graet kement-se
Tra vorzhodus dirak hon daoulagad.
- 24 Hemañ eo an Delz en deus graet an Aotrou I
Deiz a joa hag a levezh.
- 25 Hozanna, Roue troc'hori I Hozanna!
Hozanna, Roue Salver, Hozanna!
- 26 Ra vo bonnignt an Hini a zeu en anv an Aotrou
Ille ponniñgħi a reomp eus Ti an Aotrou
- 27a Doue en an Aotrou, hag ar Sklordey evidom I

eil sul goude Pask

2^e LENNADENN

Bet on marv'l ha setu m'n'z on bev brezhenn da virvikou

LENNADENN EUS LEVR DISKULIADUR SANT YANN 1, 9-10, 12-13, 17-19

Me. Yann, ho peiz hag ho kenseurt en trubuilh, er rouantelezh,

10 hag er bastianted, e Jezuz, en em gava en enezenn anvet Palmos,
en abeg m'am boa prezeget komz Doue ha douget testeni da Jezuz.

Savet e voen a spered, deiz an Aotrou, hag e klevis a-drefn din, ir voudz
kreñv, henvel ouzh trouz un drompilh.

11 hag a lavore :

Ar pezh a welez, skriv anezhañ en ul levr, ha kas anezhañ d'ar seizh I
(de Eleoz, Smirna, Pergamoz, Tistira, Sardiz, Filadelfia ha Laodikeia)

12 Distreñ a ris evit gwelout ar voudz a nomz ouzhin;
hag o vezñ distract, a wellis seihkantdior-aour.

13 hag e-kreiz ar c'hantoloioù, unan heñvel ouzh nab un den gwisket gant
ur sae hir betek e dreid, ha gourizet e vrennidbeutinjgant ie gouriz-aour.

17 Ouzh hen gwelout e kouezhia e-harz e dreid, evel m'ur; met eñ a lakaas
e zorn dehoi warmon en ur laverout :

18 Na spont ket. Me eo ar C'hentañ hag an Diwezhañ,
an Hini Bev. Bet on m'ur, ha setu ne bev evit kantvedoù ar c'hantvedoù.
ha ganin emañ an aïckweziñi eus ar Marv hag eus Ixo an Anaon.

19 Skriv eta an traou ac'h eus gwelet, an traou a zo, hag ar re a zlo
c'honvezout war o lerc'h.

ALLEGIA

Dre m'ac'h eus va gwelet, Tomaz,
e kredez, eme an Aotrou.

Efürus ar re n'o deus ket gwelet

hag o deus kredet.

Yn. 20.

AVIEL

Jezuz en em ziskouez d'e ziskibien, not Fask, hag eizh delz goude, ispisial da C

PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN 20, 19-31

19 D'aberdaez-noz, en dolz-se, ar c'hentañ eus ar sizhun,
hag an doroujor serret e-lec'h ma oa bodet an diskibien.

gant non rak ar Yuzevion.

e Ieuas Jezuz.

hag o chom en e sav en o c'hreiz, e laveras dezh :

Ar peoc'h ra vo ganeoc'h !

20 Ha goude bezñ laverat kement-se, e liskouezas dezh e zaouarn hag e gozbz.

Kerget e vee an diskibien a levenez o welout an Aotrou.

21 Laverout a reas eta Jezuz un eil gwech dezh :

Ar peoc'h ra vo ganeoc'h ! Evel m'en deus an Tad va c'haset.

evel-se lvez ne ho kas.

22 Ha goude bozañ laveret kement-se e c'hwiezhas (warzo)

hag e laveras dezh :

e flouezit ar Spered Santel.

23 Da biv bennak e pardonot o fec'hadoù dezh, e vezint pardonet.

hag ouzh piv bennak o dalc'hot, e vezint dalc'hot.

44

eil sul goude Pask

24 Hogan Tomaz, unan eus an Daouzez, an hinil anvet Didimoz (le Gouell)
ne oa ket ganto pa oa dauet Jezuz.

25 An diskibien all a laveras dezh : « Gwelet hon eus an Aotrou. »

En avat, e respondas dezh : « Mor ne welan ket en e zaouarn merk an tachou
ha mor ne lakan ket va bizec'h an tachou, ha mor ne lakan ket va dor
en e gestez, no grédiñ ket. »

26 Eizh delz war-ferc'h, edo adarre an diskibien a-barzh, ha Tomaz ganto.
Jezuz a entreas, an doroujor sorret, hag o chom en e sav en o c'hreiz
e laveras :

« Ar peoc'h ra vo ganeoc'h !

27 Ha da c'houdre e laveras da Domaz :

« Lak da viz amañ, ha sell ouzh va daouarn; astenn lvez da zorn,
hag heu laka en c'hostez, ha na vez ket diskredik met kredik. »

28 Ha Tomaz da respond ha da laverout dezh :

« Va Aotrou ha va Douz Is

29 Laverout a reas Jezuz dezh :

« Dre m'ac'h eus va gwelet, ac'h eus kredet. Evuzus ar re n'o deus ket
gwelet hag o deus kredet. »

30 Kafz a sinidou all evit gwir a reas o'hoazh Jezuz dirak e ziskibien,
ha n'int ket bet skrivel al levr-mañ.

31 Met ar re-mañ a zo het skrivel evit ma kredet
ez eo Jezuz ar Mesiaz. Mab Doue,
hag evit m'ho po die ho Feiz,
ar vuhez en e anv.

war ar profoù- Degemerit, ni ho ped, Aotrou Doue, ar profoù emañ ho pohl o kinnig
deoc'h, ha grit d'ar re a zo bet nevezet, dre anzav o feiz en
hoc'h Anv santel ha dre ar Vadeziant o deus degemeret, gonit an eñusted peurbad-
del. Dre Jezuz Krist, hon Aotrou. Amen!

rak-kanenn veur -prefas- E gwirionez, tad Santel, Doue hollc'h halloudek ha peurbad-
del, un dra reizh ha dleet eo ho trugarekaat e pep lec'h hag e
pep amzer, met dreist-holl ha gant brasoc'h meuleudi, en amzer santel-mañ, maz eo
bet Jezuz Krist, hon Dan-Pask, lakact d'ar marv evidomp. Ral En eo an Dan gwirion
en deus dilamet peched ar bed, en deus, en ur adsevel eus ar bez, roet dimp en-dro
ar Vuhez. Setu perak, gant Gouelioù Santel pask, e trid ar bed a-bezh en ur mor a
levenez, hag holl Speredou galloudusañ an Neñvou a gan meuleudi d'ho kloar, en ur
laverout da viken:

antifonenn ar c'heduniñ - Laka da zorn amañ ha guel lec'h an tachou. Arabat dit
bezñ diskredik met kredik. Alleluia!

goude keduniñ - Ni ho ped, Aotrou Doue hollc'h halloudek, grit d'ar Sakramant hon eus
degemeret hag a zegas soñj dimp eus Mister santel pask, dougen
frouezh padus en hon eneoù. Dre Jezuz Krist, hon Aotrou. Amen!

trede sul an amzer Fask

kanenn mont-tre-salm 65- Youc'hit d'an Aotrou Doue, douar a-bezh, kanit gloar d'le Anv, roit dezhaf ar vrassan meuleudi. Alleluia !

kempedenn- Ra vo ho pobl dalc'hmat el levez, Aotrou Doue, paz eo nevesaet yaou-kiz am-eneoù. Ha, bremañ, maz omp adlakaet remk klorus ho pugale, roit ar c'heras da c'hortoz gant un esperans leun a anaoudegezh vat adsav ar c'horfou marv d'ar vuhez. Dre Hor Salver Jezuz Krist, ho Mab hag hon Aotrou a vev hag a ..

Ian LENNADENN

Gwelloch sentiñ ouzh Dous egel ouzh an did, eme an Ebostel. Ni a zo testou eus ar pezh en deus graet Dous, ha ganing emañ ar Spered Santel.

LENNADENN EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL

5 Ob. 276-32, 406-41

En delizioù-se.

27 e reas ar Beleg-Mour goulennoù ouzh an Ebostel :

28 : « Difennet groñs hor hoa ouzhoc'h, emezañ, reliñ kelennadurezh en anv an den ha petra 'zo en em gavet? Leuniet hoc'h eus Jeruzalem gant ho -se kelennadurezh, hag e fell deoc'h lekaat da gouezhañ warnomp gwed an den-se. »

29 Neuze a responsat Pêr hag an Ebostel gantañ ar c'homzou-nen :

« Sentiañ a ranker ouzh Dous kentoc'h egel ouzh an did. »

30 Dous hon Tadoù en deus adsavet Jezuz a varv da vev, lag ho pos c'hwi lakaat d'ar marv ouzh hen lakaat e-pign ouzh er C'hoed.

31 Hennez eo en deus Dous uhellet evel Penmraen ha Salver, gant e zoñ denhoù, evit reliñ ar spered a binijenn da Israel, hag ar pardon eus ar poc'hedou.

32 He ni a zo testou war an holl draoù-se, ni hag ar Spered Santel en deus reet. Donez d'ar re a sent outañ. »

40b Difenn a rejont ouzh an Ebostel komz en em Jezuz, gouda bezañ a skourjezez hag o lezjont da vont.

41 Int-i neuze a guitaas (sal), ar C'huzul-Mour, stad almo o vezañ na ont bet dellezek da c'houzañ dismagañs evit Anv Jezuz.

PSALM 29

R 2b Uhel ho meulan, Aotrou Doue
Rak va adsavet hoc'h eus.
pe Alleluia.

2 84, 5-6, 11-12a 6

2 Uhel ho meulan, Aotrou Doue, rak va adsavet hoc'h eus.
Hep Laouenan va enebour diwas va lenn.

4 Diframmet hoc'h eus va ent eus an Ankou
Va adgalvet d'ar vuhez a-douez ar re a ziskenn er poull.

5 Kanneulit an Aotrou Doue, c'hwi, e vignoned.

Meull e anv santel,

8 Ur monedig e pad e gouanner, a-hed ar vuhez e garantez!
D'abardaez daerou I Diouzh ar heure/ministrez levenez !

11 Selaoüit, Aotrou Doue, ho pel truez
Roit din sikour !

43

trede sul an amzer Fask

- 12a Troet hoc'h eus va c'hañvou e dañsou
13b Autrou, va Doue, da viken, trugarez deoc'h!

2° LENNADENN

Dieuñ eo d'an Oan hug a zo bet lazhet degemer ar Nouvellezic'hieg an Douvellezic'h

LENNADENN EUS LEVR AN DISKULADUR SANT YANN

6 Disk. 1

11 Mu, Yann, a sellas, hag a glevas mouozh un niver bras a Aled u-war-dio d'an tron, d'ar C'hrouadurioù Bay ha d'ar Re-Gozh.

Baz'eo os anezho milimiliadou a vitilliadou ha milierou a vilierou,

12 hag e lavaret gant ur vousz houarne :

Dellezec' eo an Oan, an Oan hug a zo bet lazhet, da resev ar galloud ha pimivouezh, turnez ha norzh, onor ha klor ha meuliedi le

13 Hug an holl draoù krouet, ar re a zo eus neñv ha war an douar, ha diridan an douar ha war ar mor, ha komoni a zo emmo, a glevis holl o laverout r D'an Hini a zo azezel war an Tron, ha d'an Oan, ar veuleul, hag an etnoù, ar c'hiod hag an norzh evit kaptivedou ar c'hangvedou.

14 Hug ar pevar C'hrouadur Bay a laver : Amouï

Hag ar re-Gozh a gouezhas war o genou hag a gweul.

ALLELUIA

Gouzout a recomp ez eu savel Hor Salver Jezuz-Krist
a varv da vev, o gwirionez,
C'hwi, floue trechour, ouzhimp ho pel truez.

AVIEL

Jezuz savel a vary da vev en em ziskouez d'an Ebostel war ribl ar mor hag a ro da Bôr galloud war an illz.

PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN

po stumur brezhed id 1-14

1 En amzer-se en em ziskouezas Jezuz adarre d'e ziskibien war ribl mor liberied.

2 Setu anññ penaos en em ziskouezas :

2 Edou a-gwiriel Simon-Pâr ha Tomaz, an Iñini Iosauvet Didimoz, Natañael hag a oñous Kana Galilea, mibien Zebedea ha daou ziskibl all.

3 Ma lavaras Simon-Pâr dezhio :

« Mo a zo o vont da beskota. »

Hag e laverjont dezhio :

« Ni a zo o vont ivez ganit. »

Hag in da vont ba da biguet er vag; met en noz-se ne baikjont netra.

4 Krog e ou dia ja an deiz da c'houlaouï, hag e toutes Jezuz d'en em lakaat en e sav war an aod; met e ziskibien ne ouient ket e ou Jezuz,

6 Jezuz a lavaras dezhio : « Pautred, ha tapet hoc'h eus-hu un dia bonnak?

- Notra, emezo.

6 Hug eñ da laverout dezhio : Taolit ho roned en tu dehoù d'ho pog hag e kavet-tu

Ho zoñtel a rejont ha n'edont ben evit he zemnañ or-maez en abeg da niver bras ar peched.

7 Neuze an diskibl karet gant Jezuz, a lavaras da Bôr :

« An Aotrou eo le

Simon-Pâr o klevout eo an Aotrou e oñ a stardas e wiškamant-gorre

en deo d'u zargoz, rak en nozñ edo, hag en em dañsas er mor.

8 An diskibien all a zoñas gant ar vag, rak n'edont het poll diouzh an douar, nouent duou c'hant illud, ha war o luc'h e stlejont ar roued leun a bosh

9 Pa ziskouezou war an douar, e weljont uno mi tan glaou bay.

44

trede sul an amzer Fask


- 10 ir pesk warro, ha barā.
Ha Jezuz da lavarout dezhō :
- 11 i Degastit inan eus ar peked hoc'h eus tapet bremalik.
Simon-Pêr eta a bignas en dro hag a sachas ar roued d'an douar,
enni e o kant tri hag hanter-kant a besked bras;
ha daoust ma nô koment anezho, ne fregas ket ar roued.
- 12 Jezuz a lavaras dezhō :
e Denili da zebriñ ho tijuni.
Hag hini obet eus an diskibien ne greda gouleñ digontañ :
e Pliv out-te? rak gouzon a raent e o an Aotroù.
- 13 Nezeu e tostaas Jezuz hag o kemor er barz hen rons dezhō, ha gant ar pesk
e reas heñvel.
- 14 Honnezh e o an delivet gwech da Jezuz d'en em ziskouez d'e ziskibien abaoe.
nu on savet a-douez ar re varv. (fin al Léonardouz vornai)
- 15 Gouda o fred e lavaras Jezuz da Simon-Pêr :
e Simon, mab Yann, ha va c'harout a rez-te muioc'h eget ar re-mañ?
Responsi a reas :
e Ya, Aotroù, te oar e karan ac'hanout.
Ha Jezuz a lavaras dezhāñ :
- 16 e Boueta va onnodi
Lavarout a reas dezhāñ evit an oil gwech :
e Simon, Mab Yann, ha va c'harout a rez?
- Ya, Aotroù, emezañ, te oar e karan ac'hanout.
Hag e lavaras dezhāñ :
e Mess va dñavedis
- 17 Evit an delivet gwech e lavaras dezhāñ :
- Simon, Mab Yann, ha va c'harout a rez?
Glaç'harel e von Pêr, o vezañ m'en devon laveret dezhāñ evit an delivet gwech
Ha va c'harout a rez, hag e lavaras dezhāñ :
e Aotroù, pep tra e ouzout, te oar az karan.
Jezuz a lavaras dezhāñ :
e Boueta va dñavedis
- 18 E gwirionez, e gwirionez- me a laver dit : Pa oas yaouank, e lakaes da c'howiz
de-uman, hag aez d'al lec'h a blije dit : met pa vi ast kozh, ec'h
astenni da zaouarn hag un all a lako dit da c'houriz hag az kaso d'al lez
n'ez po ket c'hoant da vont.
19 Lavarout a reas kement-se da arrouzañ (da vorkan) dra be varv e bleu reizh gloaz
da Zone. Ha goudo bezañ laveret kement-se e lavaras dezhāñ :
e Deus d'am heul !

War ar profoù- Plijet ganeoc'h, ni ho ped, Aotroù Doue, degemer profoù hoc'h Iiz
el levezenez, ha peogwir ez eo c'hwi hoc'h-unan a zo penn-abeg
d'al levezenez vrás-se, roit dezh ivez ar c'hras da dañva, un deiz, al laouenidigez
zhioù peurbadus. Dre Jezuz Krist, hon Aotroù.

rak-kanenn veur- prefas - E gwirionez, tad santel, Doue hollc'halloudek ha peurbadus
del, un dra reizh ha dleet eo ho trugarekaat e pep lec'h hag e
pep amzer, met dreist-holl ha gant brasoc'h meuleudi, en amzer santel-mañ maz eo
bet Jezuz Krist, hon Dan-Pask, lakaet d'ar marv evidomp. Drezañ e vez ganet d'ar
vuhez peurbadel bugale ar sklerijenn ha d'an dud a gred ennañ e vez digoret do-
riou palez an Neñvoù. Rak hor marv-ni a zo het dasprenet gant e Varv dezhāñ e-u-

trede sul an amzer Fask

nan, ha paz eo bet adsavet d'ar vuhez ez eo bet adsavet an holl dud d'ar vuhez.
Rak-se, gant gouelioù santel Pask, e trid ar bed a-bezh en ur mor a levezenez hag
holl Speredou galloudus an neñvoù a gan meuleudi d'ho kloar, en ur lavarout da
viken:
antifonenn ar c'heduniñ- Luk.26- Ret e oa d'ar Mesiaz gouzañv poan hag adsevel
a-douez ar re varv, ha ma veze embannet en e anv ar
binijenn hag ar pardon eus ar pec'heudoù d'an holl bobloù. Alleluia!
pedenn goude keduniñ- Taolit ur sell a garantez, ni ho ped, war ho pobl, Aotroù
Doue, ha peogwir ez eo bet plijet ganeoc'h nevesaat anez-
hñv gant misterioù peurbadus, roit dezhāñ ar c'hras da gaout, un deiz, lod e glo-
ar ar c'horfou marv oc'h adsevel evit ar vuhez na dremen ket. Dre Jezuz Krist...



pevare sul an amzer Fask

kanenn mont-tre salm 33- Leun eo an douar gant karantez Doue. Dre an Aotrou
Doue ez eo bet diazezet start an Nefivoù. Alleluia!

kempedenn- Doue hollc'halloudek ha peurbadel, renit ac'hanomp d'al levenezioù
peurbadus, evit ma c'helleo deñved dinerzh ho tropellad erruout el lec'h m'eo aet
a-raok dezho ar Pastor nerzhus.

lennadenn gentañ- Kredid a reont embann Jezuz Krist.

Ian LENNADENN

Sant Paul ha Sant Barnabaz o trala war-zu ar Baganed, peogwir ne fell ket d'or Yuzevien
selaou o chommoù.

LENNADENN EUS LEVR OBEROU AN EBESTEL

13, 14, 43-62

- 14 En deizioù-se Paul ha Barnabaz o vont polloc'h egent Perge,
a draezas a vro hag a arruas en Antiochia eus Pisidia.
Un delz Sahad ez ejont d'ar sinagogenn hag ez asezjont.
- 43 Pa voo echu an emvod, kitz eus ar Yuzevien hag eus ar Brozelited devot
a yes a heul Paul ha Barnabaz:
hag ar re-mañ o komz outo, o alio start da zerc'hel mat da c'hwes Doue.
- 44 Ar sabad war-lerc'h, holl dud kér-Antiochia, pe dost, an em vodas
evit klevoù kome Doue.
- 45 O walou ar bobl-se, ar Yuzevien, a voo leun a warizi hag a zislavare
gan blasfemoi komzoù Paul.
- 46 Met Paul ha Barnabaz, savet hardizhegezh dezho, a lavaras:
+ Deoch-c'hwi da gentañ e oa ret e vije displeget komz Doue.
Met peogwir e tizarbennit anezhi, ha peogwir n'en em sellit ket dollezek
eus ar vuhez peurbadus, setu m'en em droonly war-zu ar Baganed.
- 47 Rak evel-se en deus an Aotrou (Doue) pourc'hementet desomp:
Da lakaet em eus evel sklerijend d'ar Broadoil
evit ma kasi a silvidigezh betek ar penn-pellañ eus ar bed.
- 48 O klevoù ar gerioù-se, ar Baganed a voo laouen hag en em lakaas da reñ
klod (glori) da Gomz an Aotrou, ha kement hini a o misket evit ar vuhez
peurbadus, a zevez d'ar feiz.
- 49 En em skiguñ a rae Komz an Aotrou dre ar vro-se a-bezh.
- 50 Met ar Yuzevien a blantas pennadoù or gwagez devot a renk uhel.
hag e pennoi-bras kér, hag a lakaas da zirollañ heskinadeg a-enep Paul
ha Barnabaz; ha kériz o argasas diourzh o douar.
- 51 Met int-i a hejas a enep dezhio ar boultrenn diwar o zried
hag a yes a Ikonion.
- 52 Hag an diskibled a os leun a levenez hag eus ar Spered Santel.

2.3.6.

SALM 99

R 3c Ni a zo e bobl ha deñved e beurvan.

pe Alleluia

2 Youc'hit gant joa d'an Aotrou, douar a-bezh.
Servijit an Aotrou gant levenez.
Il dirazañ en ur ganañ.

pevare sul an amzer Fask

3 Gouvezit ez eo an Aotrou s zo Doue
Eñ eo hor gress ha nokoù ni konanien,
E bobl ez omp ha deñvod e beurvan.

30

6 Rak mel eo an Aotrou Doue
Peurbadus ez eo garantez
A rumm da rumm e feñded.

2^e LENNADENN

Holl dud an holl bobloù a zo galvoù lvez da genor perzh e gressou an Aviel hag e Moli
an Oan, o Salver.

LENNADENN EUS LEVR DISKULIADUR SANT YANN

7, 9, 14b-17

- 9 Me, Yann, a welas ur bobl niverus a dud ha no c'holez den o c'hontañ,
eus an holl vroioù, eus an holl veuriadoù, eus an holl bobloù,
eus an holl yezhioù.
En em zerc'hel a raent en o sav dirak an Tron ha dirak an Oan.
gwisket gant dilhad gwenn, ha bodoù-palinez en o daouari.
- 14b Neuze unan eus ar Re Gozh a lavaras din:
+ Ar re-se eo ur re a zo deuet eus an drubuilh vrás.
gwalch'het o deus dilhad hag o gwennaeth o gwad-an Oan.
- 15 Setu perak emaint dirak Tron Doue hag oc'h ober ar servij anezhañ delz ha nez
en e Dimpl, hag an Hini a zo asezjet war an Tron o gwaskedo dindan
e Delenn.
- 16 N'o devezou mui a naon, n'o devezou mui a sec'hed, na skoio ken warnezh
hag an heol, na tonndre ebet, rak an Oan hag a zo e-kreiz an Tron,
a vo o Fastor, hag o reno etrezek fountenioù an Dourioù a Vuhel.
hag e sec'hod Doue an daeouid diouzh a daoulagad .+

ALLELUIA

Alleluia.
Me eo ar Mesar mal,
eme an Aotrou,
Hag anouat a ran va deñved-me
Ha va re-me am anavez
Alleluia.

Yn. 10.

AVIEL

Ar Pastor mat m'eo Jezuz a ro ar Vuhel Peurbadus d'o zefned.

PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT YANN

10, 27

En amzer-se a lavaras Jezuz :

- 27 + Va deñved a selouva mouezh; ha me o anavez, hag int-i a zou war va lyeck,
reñ a ran dezhio ar vuhez peurbadus, ha ne daint da goñ biken.
- 28 ha dous ebet n'o difranou eus ya dorn.
- 29 Va Zad hag en deus o root din-me, a zo brasoc'h eget an holl.
ha dun ebet ne c'heill o difranou eus dorn va Zad.
- 30 Va Zad ha Me a zo unan.s

war ar profou- Plijet ganeoc'h, ni ho ped, Aotrou Doue, reññ dimp ar c'hras da ve-
vañ el levenez dre nerzh ar Misteriou-mañ a zegas da soñj eus
Pask hor Salver, evit ma c'helleo an aberzh a vez kinniget hep paouez evit silvi-
digezh ar bed, bezaf evidomp mammenn a levenez diziwezh. Dre Jezuz Krist...


18

pevare sul an amzer Fask

rak-kanenn veur - prefas 4 - E gwirionez Tad Santel, Doue hollc'halloudek ha peur badel, un dra reizh ha dleet eo ho trugarekaat e pep lec'h hag e pep amzer, met dreist-holl ha gant brasoc'h meuleudi, en amzer santel-mañ maz eo bet Jezuz Krist, hon Oan-Pask, lakaet d'ar marv evidomp. Rak o kinnig e Gorf war ar Groaz en deus evel-se degaset da wir holl aberzhioù al Lezenn Gozh, hag ouzh en ém reiañ E-unan deoc'h-c'hwi evit hor silvidigezh, en deus diskouezet e oa war un dro Beleg, Aoter hag Oan an aberzh. Rak-se, gant gouelioù santel Pask, e trid ar bed a-bezh en ur mor a levenez, hag holl Speredou galloudus an Neñvoù a gan meu-leudi d'ho kloar, en ur lavarout da viken:

antifonenn ar c'heduniñ- Yn 20.19- Chom a reas Jezuz en e sav e-kreiz e ziskibi-hag e lavaras dezho: Ar peoc'h da vezañ ganeoc'h! Allel.

goude keduniñ- Taolit ur sell a vadelezh war ho pobl, ni ho ped, Aotrouù Doue, peo-gwir ez eus bet plijet deoc'h nevesaat anezhañ gant Misteriouù peurbadus, / roit dezhañ ar c'hras da gaout lod e gloar ar c'horfoù marv oc'h ad-sevel evit ar Vuhez a bad da viken. Dre Jezuz Krist, hon Aotrouù. Amen !



Ar Fulenn a zo kaieroù evit harpañ ur vuhez kristen bevet en hor yezh
chomlec'h: ar presbital - 29223 Plounour-Menez
prizh: 3 lur, 5 lur dre ar post